

KIS-721 – Ha bevezer eo ar yezher ?

(GC da GE – 19 04 01)

D'un dra e rankez asantiñ : an darn vuiañ eus an nevezc'herioù zo krouet ganit pe ac'hoel dindan da atebegzh evel binvioù ret da gas war-raok da imboure'hioù. Araok o lakaat en nevid e tebarzhez dezho un talvoud a zo anat dit (o “zad” ez out neketa), talvoud avat nad eo ket ken fraezh evit ar bevezer deboner. Dre ar gendestenn e oar hemañ gant pe ziskiblezh e vez ar ger-mañ ger en arver met betek pe bar e c'haller astenn e ster d'un diskiblezh all ? Termenoù ar bredelfennerezh, ar mediaouerezh oc'h aloubiñ al lavar pemdez, da skouer, ha diouer a lennegezh diles.

(GE da GC – 02 05 01)

Anv a rez eus an amzivin ma vez ar “bevezer deboner” dirak an nevezc'herioù. Koulskoude, deboner pe get, ez eo kefridi ar “bevezer” barn ha disteurel diouzh ret an termenoù nevez kinniget dezhañ. E se, ne c'haller ket bezañ “bevezer” hepken eus ar yezh, bez' ez eur dre ret bevezer ha kenderc'her war un dro : goubarel eo ar c'hemm lakaet etre yezher ha yezhour. Al lavar zo ul lec'h tremen etrezek amkanioù lec'hiet en tu-hont d'al lavar. Treugoù e-leizh a vez evit bukañ d'un amkan, doareoù e-leizh da lavarout un dra — aze emañ lec'h an didegezh, lec'h frankiz ar c'henderc'her. Kevzasoc'h eget re all e vez treugoù 'zo, doareoù lavarout 'zo, hag al lavarer a rank barn ha dibab — aze emañ lec'h ar poell, lec'h spisweled ar bevezer. An nevezc'heriañ zo eilrenk en afer, forzh penaos ne zegas ket ur gudenn disheñvel : sevel ur frazenn gevazas ha luniañ ur ger kevazas zo an un emell. Keal ebet enta evit “bevezerion deboner” da sentiñ ouzh un aotrouniezh a ve “tad” an nevezc'herioù. Ne c'haller bezañ bevezer nemet dre vezañ da gentañ kenderc'her (“beveziñ” ar gerioù zo da gentañ kenderc'hañ frazennoù). *Deboner* ?, Doue ra viro !, *devarner* ne lavaran ket ha devarner seul zidruessoc'h ma 'z eo solietoc'h e zevarnoù. Pa sellomp ouzh ar gerioù savet gant VALLEE pe HEMON, seul gent a se gant TALDIR, e tiverzhomp diouzhtu pere zo kevazas ha pere n'int ket, ha se peogwir ez eus bet tro abaoe d'o arnodiañ e-barzh frazennoù hag anat ouzh anat ez eo aet o ferzhioù mat pe fall bep ma 'z araokae talbenn ar yezh, eleze ma veze arveret ha savet testennoù drezi. N'eus nemet un doare

da amprouiñ an nevezc'herioù ez eo, n'eo ket klask an “talvoud” o deus dre zaveiñ da c'herioù allyezh na zoken, ac'hoel da gentañ, dre zaveiñ da c'herioù all ar yezh, met ober dezho talañ ouzh ergeñverenoù, pezh a zo o arnodiñ e-barzh frazennoù.